

Au fol^o 215 recto, seulement le titre :

Rouzig Kemener.

(215 recto)

[rien aux fol^{os} 215 verso et 216 recto.]

Ar Rouzig Kemener.

(216 verso)

Ar Rouzig Kemener deus a Langoat
Zo melen he vleo, glas he lagat.

C'hoas e viche Koantoch an anter
Ma n'ije eur vourc'higez a ger.

Ar Rouzig Kemener a levere
De tad a de vam eun de a we :

— Ma zad a ma mam ma n'em c'heret
Ho Konje o taou diñ a reet

Ewid ma c'hiñ d'ober eur bale
Na da welet a me a Kafje

Eun dimezel hag em eurenje
Gant gonje he zud hag he ligne.

Nag ar Rouzig Koz pa neus Klevet
he venoz de val a neus roët,

(217 verso)

Ewid ma c'haje d'ober eur bale
Da Klask a da welet e Kafje

Eun Dimezel hag en eurenje
Gant gonje he zud hag he ligne.

Ar Rouzik Kemener a lavare
En noblans ar C'houellik pa n'arrie :

— De mad a joa laran en ti man,
N' Otro ar C'houellik pelec'h e man.

Ar vates vihan a respontas
D'ar Rouzik Kemener pa n' Klevas.

218 verso)

[—] E man duze e groec'h huelan
Rouzik Kemener ed da vetan.

Ar Rouzik Kemener a lavare
D'an otro ar C'houellik pi'en Salude :

— Otro ar C'houellik me o ped
Nag eun habid dime a prestfet

Prestet din eun habid hag eun inkane
Evid ma c'hiñ d'ober eur bale

Da klask eun Dimezel em heurenje
Otro war ho revent e vije.

Da welet hag en a deui ganin
An hini o c'hous bed o refus diganti.

(219 verso)

An Otro ar Gouellik pa neus Klevet
Teir habid dean neus digasset

Eun habid ru gant prenou melen,
Eun habid gris, hag eun habid gwen,

Eur poignard ar-bant eus he goste
Eur vantel war lost he inkane.

Monsieur ar Rouzik a lavare
War bave ar roc'h pa n'arrie :

— Me a ia breman d'ober al lez
Na na na Ket ganin ma lakez

Mert ar Piker Bihan na deui ive
 A zo r' pot disourisi Kouls a me.

— Deus ganime breman Kamarad
 Me rei dide ober eur fortun vad.

(220 verso)

Monsieur ar Rouzik a lavare
 War bave raon p'an arvie :

— Dibonjour a joa oll er ger man
 An Otrio prizidant pelec'h e man ?

An Otrio Prizidant p'an deus Klevet
 He ben er prenest an deus boutet :

— Diskennet Otrio a deud en ti
 Laket vo ho ronsset er merchoSSI.

Debouchour digentil a Dreger
 Pera zo newe en ho c'harrier ?

(221 verso)

Monsieur ar Rouzik vel ma Klevas
 Kredet e we gantan eur fe vras :

— Ewidon me da vea deus a bell bro
 Non Ked deud da digas ar c'helloio.

Me a zo deud aman d'ober al lez
 Na na meus ganin med eul lakez.

— Na na ne Ket ar c'his c'hoas er vro
 Mont d'ober al lez a vandeno.

An Otrio Prizidant a c'houlenne
 Deus ar Piker bian hag an de Se :

(222 verso)

— Na lares te dime pachik mad
 Hag en zo da vest demeus er goad ?

— Ja, ma mest a zo a ligne vad
 Mar goëlas biskoas ho taou lagad.

Bean n' deus seiz lestr karget war ar mor,
 Hag en ker ar Roc'h seiz dor digor,

A ter c'hadeur en iliz Langoat
 A zo ho zer en liou d'ar goat (1)

(223 verso)

Kement all en deus en Trogeri,
 En Pleuverit ar Roc'h meur a hini;

Hag o c'hortoz he dad da vervel
 E che otro en K'daniel.

A goude ma vo maro he dad
 E deuis da Otro da Penarc'hoat.

— Ma c'houfen e ve gwir e lares din
 Kent ma hafe a han e ve an dimii.

— Nag ar Rouzik Koz a lavare
 De briet Mari en de a we:

(224 verso)

— Hastomp gruiat om c'hoz balinou
 A Kempen er vad om c'hoz druillou,

Me a Kleo trous ar c'harejo
 Gant om merc'h Kaer o tond er vro.

— Monsieurr ar Rouzik a lavare
 War bave ar Roc'h pa diskene:

— Na ne man ked an avel a vad
 Pa na man ked va listri er rad.

— An Itron ar Rouzik a lavare
 En iliz Langoat pa entree:

(225 verso)

— Na beret tu dime Monsieurr (2)
 Pini ar re man he ho Kadeur?

(1) - t final écrit en surcharge sur d (d'abord: goat).

(2) - Le ms. a 2 r (comme plus haut).

— Azeet en hini a gerfet
Itron, ne veet Ked diboentet.

O harriout Itron ar C'houellik
O tapout Krog en he dorn goustadik :

— Na Kredan Ked e ve groek eur c'hemener
A varche em c'hadeur em chever ?

— Evidon da vean groeg d'eur c'hemener
Me varcho bomde en ho Kever,

Evidon da vean groeg d'eur c'hemener
Me zo merc'h eur Prizidant d'eus Ker.

— Na leret d'ho briet Kemener
Digas habid ma vriet d'ar ger,

(227 verso)⁽¹⁾

Eun habid vras, eun inkane
Eur pognard ar'chant deus he c'hoste.

Itron ar Rouzik a lavare
War bave ar Roc'h tri de goude :

— Itron Varia ar Folgoat !
A na Kafem Ked eur re benag
Em c'hasse d'ar ger da di va zad.

homan a zo din eur Kalonnat !
Pa voan er ger en ti ma zad
Me voa Kunduet dilikat,

Gant Kig glujer pe gant Kig Kad
Pe gant Kig Kevelek rostet mad.

(226 verso)

A boë m'on arri en ti ar Rouzik
Na meus bed banac'h souben ar c'hig,

(1). — Les folios 226 et 227 sont à intervertir.

121

Nemert Souben ar c'hermiou brinig
Na na ra Ked a vad d'am c'haronik.

̄
7

[pas de trad. franç.]